

## D'an 28 a viz Kerzu

- Gouel an Dianteged Wenvidik, ar vugale dindan daou vloaz lazhet e Betleem war urzh Herodez a glaske lazhañ roue ar Yuzevion nevez-c'hanet (kv. Mzh 2,1). Adalek kantvedoù kentañ an Iliz ez int bet kehelet evel merzherion, anezho preveudi an holl re a skuilhas o gwad evit Doue war-un-dro gant Oan Doue, Salver ar bed.
- E 1718 en eskobiezh Embrun e Bro-C'hall, distro da Zoue ar bac'hiadez Benoîte Rencurel. Bugulerez e oa pa grogas, d'he seitek vloaz, da gaout emziskouezioù ar Werc'hez Vari e kêriadenn Sant-Stefan al Laus a zeuas da vezañ ul lec'h pirc'hirinañ gant ur vrientiliz.
- E 1837 e Roma, tremenvan sant Gaspard del Bufalo, beleg diazezour Kiminiaded ar Gwad Prizius hag awener Leanezed Azeulerezed Gwad ar C'hrist gant santez Maria de Mattias hag ar pac'hiad Giovanni Merlini. Beleget e 1808 e Roma e nac'has touiñ fealded da Napoleon hag en abeg da-se e voe toullbac'het.
- Er Vvet kantved, sant Romulus, eskob war enez Vanav war-lerc'h sant German.
- E 1169, eskob Naoned, sant Bernez, ganet en Eskoblag, diazezour abati Genestun.
- E 1654, e Kemper, an Tad Bernez, jezuist, keneil Dom Mikael an Nobletz ha Dom Juluan Maner.
- E 1841 e Saint-Laurent sur Sèvre, tremenvan an Aotrou beleg Gabriel Deshayes, bet Person An Alre ha vikel-vras Gwened, diazezour meur a gengregadur.

## D'an 29 a viz Kerzu

- En IIIde kantved, sant Trofim Arles, eskob. Hervez Gregor Teurng e oa unan eus ar seizh eskob bet kaset gant Roma, da-geñver heskinadurioù Decius, da aviolañ Gallia er bloavezhioù 250 eleze Martial e Lemojez, Gasian e Teurng, Trofim en Arles, Paol e Narbon, Saturnin e Tolosa, Denez e Pariz, Aostremon e Clermont.
- E 596, distro da Zoue sant Evroul (Lt. Ebrulfus), abad. Gant asant e wreg e tilezas e garg e lez Childeberzh roue Neustria evit en em ouestlañ da Zoue. Brudet evit karout ar vuhez digenvez, evit e baourentez hag e vadelezh e-keñver ar beorion e voe abad Ouche hiziv Saint-Evroult e Normandia.
- E 1170, merzherenti sant Tomaz Becket, eskob. Hag eñ kañseller meur roue Bro-Soaz Herri II e voe anvet arc'heskob Kêrgent, hogen e voe harluet dre ma tifenne ar reizhdred ha frankiz an Iliz enep ar roue. Goude c'hwec'h bloaz e Bro-C'Hall e tistroas d'e vro hag en devoe kalz da c'houzañv c'hoazh betek bezañ drouklazhet en e iliz-veur gant marc'heion ar roue.
- En Iwerzhon, e 665, sant Aireran, lesanvet "ar Fur", manac'h e Clúain Ioráird, marvet e-kerzh ar vosenn veur.
- En Iwerzhon, er XVIvet kantved, merzherenti sant Ealanor.

## D'an 30 a viz Kerzu

- E 274, distro da Zoue sant Felis, pab a voe e penn Iliz Roma da vare an impalaer Aurelianus a savas kehelerezh an heol Sol invictis.
- E 494, sant Perpetuus (Gl. Perpet pe Perpetue), eskob Teurng, a rakwezas ur senez e Gwened e 465, eskober sant Padern Gwened,.
- En Iwerzhon, er Vvet kantved, santez Tigrid pe Tirid, rouanez Vreizh ha penitiourez. C'Hoar sant Padrig, abostol Iwerzhon, eo santez Tirid. Eveltañ hag e c'hoar santez Lupita eo bet ganet e Breizh-Veur eus Calpurnius ha santez Koñsez, c'hoar sant Varzhin. Deuet gant he zud d'an Arvorig e timezas e 382 gant Grallon, kont Kernev deuet da vezañ roue Breizh e 434. E-touez o bugale e konter sant Mun ha marteze sant Loman. Ur wezh intañvez e 445 ez eas da gaout e vreur sant Padrig en Iwerzhon lec'h ma voe penitiourez.
- En Iwerzhon, sant Ailbhe (Elvez), eskob.

## D'an 31 a viz Kerzu

- E 274, e Sens e Burgondia, merzherenti santez Kolomba (GL. Colombe), gwerc'hez. Ganet e Bro-Spagn en un tiegezh tierned bagan e tec'has gant un nebeud kristenion abalamour d'an heskinadegoù. Badezet e voe e Viena hag en em stalias e Sens e Burgondia lec'h ma oa un gumuniezh kristen niverus. Talañ a reas ouzh ar pennadurezhioù roman a glaskas he lakaat a zinac'hañ he feiz hag en diwezh e voe merzheriet. Un iliz ha diwezhatoc'h ur manati a voe savet war he bez.
- E 302, e Roma war ar via Salaria, merzherenti santez Nominanda pe Dominanda, gwerc'hez.
- E 335, e Roma, merzherenti sant Silvestr, pab a gretaas goursenez kentañ Nikaia oc'h embann ar C'hrist Mab Doue hervez reizhkredenn an Iliz. Antronoz an heskinadurioù roman e voe dezhañ da frammañ an Iliz en ur gevredigezh peoc'haet. Gant harp an impalaer Kustentin e savas brientilizoù azaouezadus Roma. Gwelout a reas ar feiz kristen o c'hounit holl renkadoù ar gevredigezh, met test e voe ivez, dic'halloud, eus disivoud ar beleg aleksandriat Arius a nac'he doueelezh ar C'hrist.
- War-dro 350, e Kêrgustentin, merzherenti sant Zotig, beleg. Genidik eus Roma ez eas gant an impalaer Kustentin en e gêrbenn nevez hag e tiazegas eno ul lovr di, un ospital evit ar beorion hag un emzivati. Goude marv Kustentin, da vare Constansius e voe flatret, dre warizi, evel drougober ha karteliet etre mulezed.
- Santez Melania an hini yaouank, † 439, ha sant Pinian he gwaz, † e 440. Kuitaat a rejont Roma evit mont da Jeruzalem. Eno e vevas hi e-touez ar maouezed kensakret hag eñ gant ar venec'h.
- E 1640, distro da Zoue sant Yann-Frañsez Regis 25, beleg eus Keneilezh Jezuz, prezeger misionoù er Vivarais en Okitania, marvet e La Louvesc.
- Tremenvan santez Katell Laboure a vez lidet d'an 28 a viz Here. Lidet e vez d'ar 16/06 gant ar Jezuisted.
- Er Vvet kantved e Breizh, sant Maeleg, abad, Iwerzhonad, diskibl sant Eflamm, savour ur manati e Lanvaeleg e Bro-Dreger.

## D'ar 1 a viz Genver

- - En Eizhved Nedeleg, **Gouel-meur Santez Mari Mamm Doue**, disklêriet *Theotokos* gant Senez-Meur Efezos e 431 dre m'en deus al Logos - eleze ar *Verb* pe ar *Ger* - kemeret korf enni ha m'eo deuet da chom e touez an denion, hag Eñ tiern ar peoc'h a zo bet roet dezhañ an anv a-us da bep anv<sup>1</sup>.
- E 391, e Roma, merzherenti sant Almachius. Evit lakaat da baouez emgann ar gleziataerion e youc'has er sirk: « Paouezit gant brizhkredennoù an idolennnoù hag an aberzhioù dic'hlan!» Neuze e voe lakaet d'ar marv ganto ha kontet e-touez ar verzherion.
- War-dro 514, sant Oyend (Eugendus e latin), diskibl sant Roman ha sant Lupisin, pevare abad Condat hizi Sant-Klaoda er Jura.
- E 1049, distro da Zoue sant Odilon, abad Cluny a ziazegas en e vanatioù Kounlid an holl Anaon, antronoz Gouel an Hollsent. Strizh evitañ, e oa kuñv ha trugarezus evit ar re all.
- E Breizh, er IVre kantved, sant Lupian. Ganet e Reudied e Bro-Naoned, badezet gant sant Hiler.
- E Breizh, en IXvet kantved, sant Houarnedin, manac'h ha beleg.
- Er Vvet kantved, sant Beveg, abad, ganet e mervent an enezenn (Kembre), diazezer manati Loch Dearg (Loc'h Ruz) en Iwerzhon.
- Er VIvet kantved, sant Baglan eus Castell-nedd ("Neath" e Saozneg), manac'h bet stummet gant sant Ildud e Llanilltud Fawr diazeour un iliz, hiziv Baglan e kreisteiz Kembre a voe kreizenn e obererezh abostolel. Hervez lod e vefe breur sant Kadvan.
- Er VIvet kantved, sant Levin, manac'h, diskibl sant Kadvan e Breizh-Veur.

---

<sup>1</sup>Lidet e veze ar gouel-mañ e lec'hioù zo d'an eil Sul eus miz Here hag e voe savelet gant Pius XI d'an 11 a viz Here e 1931 da geñver 15<sup>vet</sup> kantveder Senez Efezos. Desezet eo bet goude goursenez Vatikan II, eizhteiz goude gouel Ginivelezh an Arloz ha da zeiz an amdroc'hidigezh.

- Er VIvet kantved, sant Maelrez, manac'h, mab un tiern e mervent an enezenn (Kembre), diskibl sant Kadvan.
- Er VIvet kantved, war enezenn Vreizh, sant Elvan ha sant Medwen.
- Er VIvet kantved, sant Doc'h pe Dogwen pe Doc'hou, abad-eskob e Kernev-Veur, a savas daou abati e mervent an enezenn (Kembre); kenaozer an deved kelt gant ar sent Gweltaz ha Devi.
- Er VIvet kantved, en inizi Aran, santez Fainche, abadez, c'hoar sant Eanna (Enna).
- Er VIvet kantved, sant Skodin, Iwerzhonad, diskibl sant Devi e mervent an enezen (Kembre), penitiour.
- Er VIvet kantved, sant Cuan, abad penitiour, a savas meur a vanati en Iwerzhon.
- En Iwerzhon, e 590, santez Kevnadan, abadez Cill Dara; er VIIvet kantved, sant Arvezeg,
- En Iwerzhon, er VIIvet kantved, sant Mochua, abad. Kuitaat a reas micher ar c'hlavioù evit mont da vanac'h. Gantañ e voe savet an iliz vaen gentañ war an enezenn.

## D'an 2 eil a viz Genver

- Er bloaz 136, merzherenti sant Telesfor, pab. Genidik eus Bro-C'hres e voe diuzet da bab e 125. Gouez d'an hengoun degaset gant sant Irenaioz ha sant Euzeb, e voe ar pab kentañ a voe merzheriet war-lerc'h sant Pêr. Dekrediñ a reas e vije kanet ar Gloria e-pad oferenn nozvezh Nedeleg.
- Gouel sant Bazilios Veur, marvet e 379, eskob Kazareia a gKappadokea (hiziv Kaizeri e Turkia), savour ur reolenn evit ar venec'h, ha sant Gregor Nazianzus, marvet e 389 pe 390, eskob Sazimes ha goude-se Kêrgustentin, doazhoured eus an Iliz. Hag int doueonourion ampart e voe degemeret o c'helennadurezh diwar-benn an Dreinded e Senez Ekumenek Kêrgustentin e 381.
- E 408, e gouelec'h al Logelloù en Egipt, ganedigezh en neñvoù sant Makaer, beleg penitiour. Hag eñ gwerzhour frouezh en Aleksandria en em dennas er gouelec'h d'e zaou-ugent vloaz. Deuet da vezañ beleg en devoe levezon vras war ar benitiourion en em gave d'ar Sul gantañ evit al liderezh ha ma roe dezho magadurezh speredel leun a furnez.
- Emziskouezadenn Itron-Varia ar Piler (del Pilar). Er bloavezh a c'hras 39, daoust ma oa o vevañ gant an Abostol sant Yann en Efezos, en em ziskouezas ar Werc'hez Vari e Saragossa, pintet war ur piler, d'an Abostol sant Jakez p'edo o avielañ ar vro.
- Er bloaz 630, distro da Zoue sant Blidou pe Bladulph, manac'h, diskibl sant Koulman e Bobbio en Emilia-Romagna e Bro-Italia.
- E Breizh, e 847, sant Leohenvel, manac'h ha beleg, diskibl sant Konvoion. Priol Redon, breutaer, difennour ar beorion, an emzivad hag an intañvezed, e savas ur c'hlañvdi e-kichen ar manati.
- En Iwerzhon, er VIIvet kantved, sant Munchim, eskob Luimneach. Lesanvet ar fur pe c'hoazh Mainchin, eleze "manac'h bihan". Moarvat e oa bet ganet e kontelezh Chláir (Clare).

## D'an 3 a viz Genver

- **Gouel Anv Santel Jezuz.** Hervez kemenn an arc'hael Gabriel da sant Jozef e voe roet an anv a Jezuz – o talvezout *Doue a saly*, da vugel Doue Betleem, d'an eizhvet deiz goude e c'hanedigezh.

Sant Bernardin a Sienna a savelas hag a skignas ar c'hiz da ziskouez Anv Santel Jezuz, direet d'e dri lizherenn gentañ IHS, bodet e stumm un unarouez gronnet gant skinoù, e gwazoniezh evit *Iesus Hominum Salvator*, "Jezuz Salver an denion". An deoliezh a voe brudet ivez gant sant Yann Kapistran, eñ ivez eus urzh ar Vreudeur Minored. E 1530 e voe aotreet gant ar pab Klemes VII e vefe lidet gouel Anv Santel Jezuz gant an Urzh, hag e 1722 gant an Iliz hollvedel. Dilamet e 1969, e voe adsavelet ar gouel gant sant Yann-Baol II e 2002. E Breizh e voe hollvrudet unarouez ar Salver, kizellet war an ilizoù, an tiez, an arrebeuri, brodet war ar gwiskamantoù hag all.

- E 236, merzherenti sant Anterus, pab. Diuzet goude merzherinti sant Pontian e krogas da zastum danevelloù ha relegoù ar verzhherion, hogen goude c’hwec’h sizhunvezh war sez Pêr e voe harzet ha lakaet d’ar marv war urzh an impalaer Maximinus Thrax ha sebeliet e katakomboù sant Kalist.
- E 512, distro da Zoue santez Genovefa, gwerc’hez e Lutetia Pariziorum hiziv Pariz, patromez ar gêr. D’he femzek bloaz e resevas gouel ar gwerc’hezed eus daouarn sant Garmon Autesiodurum. Reiñ a reas kalon da annezidi ar gêr da-geñver an aloubadegoù hag e pourchasas boued pa voe naonegezh.
- War-dro 660, sant Bertilia Thüringen, gwreg Walbert Haino (Gg Hainault). Hag hi a lignez uhel e vevas en un doare eeun-kenañ, pried skouerius ha mamm santel santez Aldegond pe Alda ha santez Waltrud.
- E 673, sant Blimond, abad e Bro-C’hall. Genidik eus rannbarzh Viena, hiziv Vienne en Dauphiné (Bro-C’Hall), ez eas da vanac’h e manati Leucanaus (Leuconne) renet gant sant Valeri, hemañ bet stummet e Luxovium. Pa voe diskaret ar manati gant an Normaned, ez eas da vBobbio. Ur wezh distroet, e adsavas ar manati gant reolenn sant Koulman lec’h m’emañ kêr Saint-Valery-sur-Somme.
- E Breizh, santez Gwenezan, gwerc’hez e Bear e Bro-Dreger.
- Er VIvet kantved, sant Hedewen, manac’h a genlabouras gant sant Kadvan e Kernev-Veur.
- Er VIvet kantved, sant Gwennluc’h (Iw. Fionnlugh), abad Tamlachtfionnlughán en Iwerzhon, diskibl sant Koulmkell en enez Iona.
- Er VIvet kantved, sant Fionntan, manac’h. Breur sant Gwennluc’h, diskibl sant Koulmkell, abos-tolour ar feiz en Iwerzhon hag e Breizh-Veur.
- En IXvet kantved, sant Gwinganton (Gg Vincanton), penitiour e Breizh.

